



Laeret ez eus bet ur maen prizius

D'ar Sul 25 a viz Genver ez eus bet laeret ur maen prizius roz e ti an aotrou Pinvidig.

Emañ an enseller Frifurch o c'houlennata ar re damallet.

« N'eo ket me an hini eo. Er sinema e oan o sellet ouzh ur film farsus », a lavar Liza.

« N'eo ket me an hini eo. En aod e oan o neuial », a lavar Lukaz.

« N'eo ket me an hini eo. Chomet on em gwele. Klañv on gant ar grip abaoe daou zevezh », a lavar Lilou en ur glemmichat.

Kavet eo bet an hini g/kablus gant an aotrou Frifurch. « Gevier spontus en doa livet din », emezañ.



Lak ur groaz er c'hombod a zere :

	GWIR	GAOU
1. Melen eo ar maen prizius.		
2. En aod e oa Liza.		
3. Klañv e oa Lilou.		
4. Gevier en doa livet an hini kablus.		
5. Er sinema e oa Lukaz.		

Kloka gant anv an hini a gomz :

« En aod e oan o neuial », a lavar _____

« Er sinema e oan o sellet ouzh ur film farsus », a lavar _____

« Chomet on em gwele », a lavar _____

« Gevier spontus en doa livet din », eme _____

C'hoari an enseller.

_____ eo an hini g/kablus

rak _____

